

Da-lud bre-ze-lerien, paotred hor Breiz-Izel, a zalc'h
soun ho pannel en tan ar brezel! A-dreuz ar reuz euzus be-
pred ar Vre-toned a stourm e-vit ar Frans evel le-o-
ned Soudard war droad, war varc'h, e-vel re-der ar mor, En-dro
d'ho tal e luf eur c'helc'h a e-nor! Da-lud bre-ze-lerien, paotred
hor-Breiz I-zel, a zalc'h soun ho pannel en tan ar brezel!

Salud, Brezelerien, paotred hor Breiz-Izel,
A zalc'h soun ho pannel e tan ar brezel!
A-dreuz ar reuz euzus bepred ar Vretoned
A stourm evit ar Frans evel leoned.
Soudard war droad, war varc'h, evel reder ar mor,
En-dro d'ho tal e luf eur c'helc'h a enor.
Salud, brezelerien, paotred Breiz-Izel,
A zalc'h soun ho pannel e tan ar brezel!

Dre-holl, 'hed an talben, ho kaver c'houi, Breiziz,
Gwazed n'int ket boazet da zont war o c'hiz.
Kouls e difenn Verdun hag en asailh ar Somm
N'eus ket par d'eo'h da roi d'ar Voched kaout tomm;
Er rusta tachennou, ra vez spontus ar c'hrog,
Piou nemet ar Vreiziz a vez en a-raok?
Salud, Brezelerien, paotred Breiz-Izel,
A zalc'h soun ho pannel e tan ar brezel!

Salud, rejimanchou Kemper, Brest, an Naoned,
Re Wengamp, Sant-Brieg, Roazon ha Gwened!
Siouaz, war an dachen, en draonien, roz pe koad,
Breiziz, priou 'oar ped gwech e ruilhas hc kwad!
Ankou dir ar Brezel start en deus bet falc'het.....
Startoc'h ouz ar bleizi ho peus bet dalc'het!
Salud Brezelerien, paotred Breiz-Izel,
A zalc'h soun ho pannel e tan ar brezel!

Salud d'eo'h-c'houi, dreist-holl, a zo kouezet du-hont,
Gwazed e-kreiz ho prud, tud yaouank dispont!
E peoc'h ra ziskuizo ho korfoù paour maro!
Warnoc'h eo e savo kaeroc'h eost ar Vro.
Ha diouz ho Paradoz goulennit ouz ar Mestr
Ma flastrimp ar Voched, ma vimp digabestr!
Salud Anaon keiz, soudarded Breiz-Izel,
Kouezet 'vit ho pannel e tan ar brezel!